

coll. 74 Phil. 6

:- RESPOND D'A JOSEB AR PAYSANT KOZ :-

1

Dech barzin voar blouneve
Pa oa fin ar marchat
On tamick goude kreiste
Kaviz or chararad

2

Dré ma oa or pennad zo
Na moampket n'om welet
A ant rezomp a nor bistro
Evit terri on seche

3

Ebarz in hostelleri
A wo on tamik brud
Me gred a wo daou barti
Assemblez ho tiscut

4

Evel a man ar goustumans
Aroc pemp election
Oa ar politique méchance
Oar ar conversation

5

On den teo chru y glipen
Oa pen da chrech an d'ol
Ha ni veg or cigaren
Evel on dreugen gol

6

Zel aze méan potret
On tanvoelten cigare
Dirag omp traou d'a evet
Pevet d'imp gant Kerouartz

7

Henez aboue daou vloas zo
A neuz goal labouret
Evit interst ar vro
Hag ar baysantet

8

Y blaç o zo bars ar gambr
Evit remplaç y dad
Ha dreze zur a keleamp
Voto evit an d'alchmad

9

Or paysant veçonnet mad
Deuz a gartien Perran
A larrez dan ma den mad
Mar peuz fin da barlant

10

Aman barz in berr gomjou
Me a meuz an desir
Da respond d'he propojous
Zo pelle deus bezan gwir

11

Me gred et och dy avis
Hac on tam culotet
Tont d'a vant ar marquis
Déun d'ar baysantet

12

Y labour zo beb wall
Ha pell deuz bout divlam
Graet à neuz evel goejal
An diaoul da harr y vam

13

Evel tout ar wénardet
Neuz votet ordinal
Enep dar baysanted
Gant Tardieu ha Laval

14

Refet da gredi da zen
Na gredeket oh c'hunan
Halfe a marquis Oswen
Divenn ar re wian

15

Franchamant me choul ganach
Mar n'ochket o farçal
Pe matreze jonch ganac'h
Eman zot ar re àll

16

Pell hre ger ar mérious
Hre varhamad ar loênet
Hà pez a momp da brénou
Na ziskena tam bet

17

Interest Kerouartz neket
Da divem ar mèrou
Daou interest ken énep
Evel an tan ac an dour

18

Feurmi ar priz uvellan
Interest ar marquis
Hini ar merer gredan
Feurmi nizellan pris

19

Ir gampr ar pris izellan
Neuz goulet an autrou
Pemp gouech keroc a vank dan
Chomfe ar mérious

20

William Loth neuz lavaret
A oa travoal taer gêch
A dar gampr mar bé kasset
Don divenn a réi bé'h

21

Mar chom Tardieu ha Kerouart
Da gass an hernaj choas
Aroch or bloas me lavar
Vemp laket tout an noas

22

C'hret e bezan trelatet
Ben zou ten a fe vad
Na neusket *Tardieu* laket
Ar paysant a blad

23

Loenet est ranjour deue
In vranç dré villionaou
c'hac on ré ny a chomé
Da zibri boued ar c'hraou

24

Me c'houl gant a re aman
A zo denz on c'hilaou
Mar zo unan a gaf dan
A kersa mad an traou

25

Hret e bezan dall a bouar
Petramand or ballot
Da gompajari *Kerouartz*
Deuz an den zavand Loth

26

In Roazen e ma ganet
Kapital breiz isel
Or breizad braz renommed
Den a speret huel

27

Dre inventionou dispar
Evit espern bueyou
Neus num holoët a c'hloar
Ebarz an cll vroyou

28

I dad deuz a Guéméné
War vord kaojous Gouarec
Professour zavand ive
A breizad kalonec

29

A non mesk on tu benac
Kerent d'an à gaver
Hillion deus Bourbriac
Kergreis deus ar Guerguer

30

Hurusso ran pan zon jan
In infam Valoris
Digasset d'in labéan
Pevet gant ar marquis

31

Valoris zo condannet
Dirag an tribunal
Evit bezan attaket
Enor on den léal

32

Ar marquis gant Louis Morel
C'hac électourien kallec
Zo condaonet neusket pel
Evel nivoa meritet

33

Ebarz in zant Nicolas
On kaméret Hamon
Neus skarzet or chouan braz
Oa pelzo oar an tron

34

Usurerien an Noblanc
Tu ven an tud néant
A zo poent de c'hrei in Franç
Plaç da dud a skiant

35

Marquis de Kerouartz a doucha
Hep houesi taken bed
Trisec million ar bloas
Gant ar baysantet

36

Cetu preuvenou aze
Ac aso scler avoalc'h
Penez sicourd a ne
Evit skarzo ho yalch

37

Goulet gant y verourien
Pegen trist he o zi
Ar marquis no goulfequet
Da ober marchossi

38

Y dud koz a bep amzer
Zo bet enep dar bol
Biskoas neus bet meit miser
Diudan c'hren an dud nobl

39

C'hoas a deuz an insolenc
Da lavarst bemde
Penos a deus laket Vranç
Bars in prosperite

40

Dreuz kavan trist goelet
Tud gant kovaou bras sten
Hac ho vriaou culotet
Ho horpat labourerien

41

Potret paour n'ankoazet ket
Cigarennou *Kerouart*
A zo arc' hant gonet
Gant labourerien douar

42

Dissul evit goellat on stad
Nimp a voto hep fot
Evit or republican mad
On mignon Willian Loth

Alchoueder hru QUARTIER PERRAN

Plounevez-Quintin, le 29 Avril 1932